




Brezel ar **PARKEIER**



C'hoant zo staliañ mil labourer-douar ar bloaz bep bloaz a-benn 2028 e Breizh. Hiziv n'eus nemet 500 a-boan a zeu a-benn d'en em staliañ e-keit ma weler tiez-feurm divent o tont war wel dre doareoù luziet d'o sevel diouzh al lezenn. Tiez-feurm 1.000 hektar, 1.400 a-wechoù memes. Boaz eo deuet gwelet atantoù gant ouzhpenn eget 200 hektar tachenn. En ur ober dek vloaz e oa deuet an hanter muioc'h diouto.

Darn en devez c'hoant devezhioù-arat ouzhpenn evit hadañ maiz, darn all evit skuilhañ hañvouez o loened, sevel ur metanizer, solutaat an embregerezh, brasaat a-raok treuzkas ar stal d'ar vugale. Pep hini a ya gant ur strategiezh evit dont a-benn d'ober diouzh e c'hoant, na pa vefe war bevennoù al lezennoù pe c'hoazh implij ar feulster.



JEAN LEVELIGLE - LES SAVOIRS AMBULANTS

Brezel ar parkeier

Bet embannet e miz Gwengolo 2023

C'hoant zo staliañ mil labourer-douar ar bloaz bep bloaz a-benn 2028 e Breizh. Hiziv n'eus nemet 500 a-boan a zeu a-benn d'en em staliañ e-keit ma weler tiez-feurm divent o tont war wel dre doareoù luziet d'o sevel diouzh al lezenn. Tiez-feurm 1.000 hektar, 1.400 a-wechoù memes. Boaz eo deuet gwelet atan-toù gant ouzhpenn eget 200 hektar tachenn. En ur ober dek vloaz e oa deuet an hanter muioc'h diouto.

Darn en devez c'hoant devezhioù-arat ouzhpenn evit hadañ maiz, darn all evit skuilhañ hañvouez o loened, sevel ur metanizer, solutaat an embregerezh, brasaat a-raok treuzkas ar stal d'ar vugale. Ha ne gonter ket lontegezh ar c'hêrioù a gemerfe a-walc'h un dornad devezhioù-arat da ober lodennoù ha sevel-tiez pe c'hoazh sevel ur greizenn-genwerzh bennak. Pep hini a ya gant ur strategiezh evit dont a-benn d'ober diouzh e c'hoant, na pa vefe war bevennoù al lezennoù pe c'hoazh implij ar feulster.

Ul luskad don an hini eo : roet lañs dezhañ gant ar Stad C'hall goude an eil brezel bed, bodañ an tiez-feurm ha kreskiñ anezho war goust al labour-douar familh. Embann a ra kaout c'hoant da cheñch penn d'ar vazh bremañ ha harpañ an dud d'en em staliañ.

Evit tizhout ar pal ez eus daou dredeog. Ar Safer a vez o verañ gwerzh an douaroù kuit da gaout brokerezh war ar font ha soursial sikour an atantoù da chom. Ar CDOA, bodad departamant heñcherezh al labour-douar, a ro an aotreoù labourat an tachennoù d'al labourerien-douar. Ha teknikoù zo kuit da vezañ tapet berr ha kastizet.

Piv eo Splann !

Splann ! a zo ur gevredigezh (mod lezenn 1901) a zo he fal dezhi kas da benn enklaskoù-kazetenniñ poellek evit an dud e Breizh hag ar bed, e galleg ha brezhoneg. E Bro-Dreger, e Gwengamp, emañ staliet. A-drugarez da zonezonoù an dud e c'hall *Splann !* Goprañ kazetennerien da labourat war an hir-dermen hag embann enklaskoù war e lec'hienn internet hag e lizher-kelaouiñ.

Lakit hoc'h anv a-benn degemer al lizher-kelaouiñ !

Gall a reoc'h heuliañ ha souten ac'hanomp en ur lakaat hoc'h anv a-benn degemer hol lizher-kelaouiñ bep miz war www.splann.org
Sellit ouzh ar pezh zo nevez ivez dre ar rouedadoù sokial :

LODENN 1

STALIOÙ LABOUR-DOUAR BRAS DIVENT SAVET E-SKEUD AR SELLOÙ

..... pajenn 7

Pa vez erru ouzhpenn 180 hektar gant un ti-feurm e vez re vras evit servijoù ar Stad. Koulskoude ez eus lod gant muioc'h eget 1.000 hektar, da lavaret eo kement ha gant 20 ti-feurm diouzh ar vent dre geidenn.

LODENN 2

AR SAFER, BENVEG MERGLET MERAÑ GWERZH AN DOUAROÙ

... pajenn15

Ar Safer zo mestr war gwerzh ar parkeier e Frañs. Erru eo skuizh koulskoude pa ne zeu ken a-benn da virout ouzh rastellerezh an douaroù labour-douar, na da staliañ 1.000 labourer-douar ar bloaz, evel ma fell da Rannvro Breizh.

LODENN 3

PROMETIÑ, TOUIÑ, HA SALUDIÑ : FEULTSTER GWERZH AN DOUAROÙ

pajenn 23

An douaroù mat da labourat n'haller ket kaout ouzhpenn ma n'eus dioute. A-benn kaout an tachennoù a vez c'hoant da gaout e vez ret ober e doull e-touez ar re-all.

LODENN 4

AN ADTAPOUT TIEZ-FEURM STANKET

..... pajenn 33

A-benn kaout an tachennoù a vez c'hoant da gaout e vez ret ober e doull e-touez ar re-all. Ha pep tra zo aotreet evit lakaat a-gostez unan-all zo war ar renk.

Boest du

E-kerzh hon enklask hon doa studiet degadoù a zielloù, danevelloù ha bet e oamp o welet degadoù a dud. Ul lodenn vihan zo meneget en enklask. An dud bet o testeni evit an enklask-mañ hon eus cheñchet o anvioù tost d'an holl anezho. Aon o deus bezañ wazh ha gouzañv, rak ar gourdrouzioù ivez ha rak an aon e vefe lakaet gwask warno pe war an dud tost dezho. Rouestlet eo bed al labour-douar hag ar bed war ar maez, ha dont a ra an abafamantoù betek porzh an ti-feurm, war an treuzoù.

Bet e oamp o c'houlenn muioc'h digant ar pennoù embregerezh a c'hoari gant sevel kevredadoù. François Le Bihan, Laurent Dartois, Dominique Kerdoncuff ha familh Nagat n'o deus ket respontet deomp. N'eus ket respontet deomp kennebeut Quentin Sergent. Bet e oamp neuze o welet servijoù ar Stad, prefeti, Draaf ha DDTM, nac'het o deus bezañ aterset gant *Splann* !. O respontoù a zo da lenn war www.splann.org.

Bepred e oa bet respontet d'un darn eus ar roll goulennoù dre skrid. Rannvro Breizh he doa nac'het sevel un atersadenn gant Arnaud Lecuyer, bezprezidant e karg al labour-douar, met skrivet o doa deomp da respont d'un darn eus ar goulennoù. Setu ar respontoù a oa bet diganto.

Adkavit ac'hanomp war ar rouedadoù sokial :



@Splannenquetes



@Splannenquetes



Splann lanceur
d'enquêtes



@Splannenquetes



Splann

STALIOÙ LABOUR-DOUAR BRAS DIVENT SAVET E-SKEUD AR SELLOÙ

Pa vez erru ouzhpenn 180 hektar gant un ti-feurm e vez re vras evit servijoù ar Stad. Koulskoude ez eus lod gant muioc'h eget 1.000 hektar, da lavaret eo kement ha gant 20 ti-feurm diouzh ar vent dre geidenn. Tamm-ha-tamm ez a diwar wel al labour-douar familh evit lezel ar plas d'al labour-douar embregerezh, a gas an dud kuit eus ar maezioù. Ar Stad a nac'h eus e du gwelet ar pezh a c'hoarvez.



- 】 Tiez-feurm 1.000 hektar, ar Stad bourdet en nac'hadenn.
- 】 Doareoù sevel embregerezhioù en ur c'hoari gant lezenn a ro an dro da vrasaat tiez-ferm dibaouez.
- 】 Hentad ar sevel moc'h, kampion ar bernioù douaroù.
- 】 En ur ober dek vloaz ez eus an hanter muioc'h a diez-feurm gant ouzhpenn 200 hektar.

Ur roched gant karrezennoù Ralph Lauren, un doudoun glas teñval hag ur bragoù ferret, François Le Bihan a chom da bozañ¹gant kaol-fleur pe brikoli en e daouarn diouzh ezhommoù ar boltrederien. Kinniget e vez diouzh an dro e-giz ul « labourer-douar », un « desaver » pe c'hoazh ur « gounideg-douar ». François Le Bihan zo ur penn embregerezh dreist da bep tra, diwar hêrezh labour war hir dermen e dad Daniel. E holding FLB zo e penn e holl embregerezhioù. Renablet hon eus 23 embregerezh, 11 stumm lezennel disheñvel : EARL, SCI, ha GFA, met kenstrolloù implijerien ivez, evel ar GIE (groupement d'intérêt économique / kenstroll interestoù ekonomikel) hag evel-just an SCEA. A-drugarez d'an SCEA/ société civile d'exploitation agricole/ kevredad keodedel labourerezh-douar, e c'hell mont e penn un embregerezh en ur adprenañ en meur a wech al lodennoù anezhi. Un doare diouzh al lezenn evit lonkañ un amezeg hep na deufe servijoù ar Stad da fourañ e fri en o aferioù. François Le Bihan en deus prenet un ti-feurm 160 hekar dre amañ, unan-all 30 hektar dre-eno. Pa lakaer pep tra penn ouzh penn ez eus, da nebeutañ 1.450 hektar. Meur a hini o deus lavaret deomp e oamp pell eus ar gont c'hoazh. An douaroù-se a ya eus PIlledran ha kazi betek Loudia (Loudieg), en ur dremen dre dTrevé, Saint-Cradè (Sant-Karadeg), Emontouer ha Berhan. Gant ma n'eus ket girzhier ken, na gwez, na kleuzioù alese

tachennoù bras ha kantadoù a hektarioù gant renkadoù legumaj hag edeier kichen-ha-kichen ar c'hrevier-moc'h hag an hangarioù. Dre geidenn e vez un ti-feurm e Breizh e-tro 62 hektar². Beli Le Bihan zo ken bras ha 22,5 di-feurm e-unan.



PENAO S'HOARI GANT AR REOLENNOÙ

Evit lonkañ e amezeien hag astenn e zomani eo bet hir an hent, marc'hata hag ijin gant al lezenn zo bet ezhomm gant ar pal tennañ gounid eus an douaroù. Ur strategiezh aotreet gant al lezenn a gas disoc'hoù a-enep kren d'al laz hollek, d'ar palioù a lak ar Stad C'hall hec'h-unan evit mirout ha harpañ al labour-douar familh. Adprenañ tiez-feurm en ur c'hoari gant prenañ ha adprenañ lodennoù zo ur boaz e ti Le Bihan, evel ma oa bet graet gant Gaec ar Point du jour, un ti-feurm a oa dioutañ 50 vloaz zo, adprenet en ur teir gwech.

E 1975 e sav ar familh Nagat Gaec ar Point du jour, un atant moc'h staliet e Loudieg, war ar maez, e kreiz Breizh. E 1989 ez a Marcel war e leve ha gwerzhañ a ra e lodennoù d'ar remziad nevez : Patrick, Thierry, Didier hag an hini yaouankañ, Bertrand Nagat. E 2016 int erru tout etre 55 bloaz 62 vloaz. Ur prantad a-bouez e buhez an desaverien-mañ hag hini o embregerezh. Dreist-holl pa fell dezho treuzkas ur benveg labour e stad vad, 243 hektar tachenn gantañ ha tennañ ur priz mat

1] « Un grand patron aux champs », pennad, *Le Télégramme*, 15 a viz Mae 2019

2] *La Bretagne perd un quart de ses exploitations en dix ans, mais conserve sa surface agricole*, Agreste, miz Kerzu 2021



evit kaout arc’hant da vont war e leve. Ar bloaz-se ez a Patrick kuit eus an embregerezh, deuet da vezañ ur c’hevredad keodedel labour-douar anavezetoc’h er stumm SCEA. Ar framm-se zo diouzh al lezenn unan a ro an dro da werzhañ an embregerezh tamm-ha tamm. François Le Bihan hag e c’hoar Myriam a lak un troad kentañ er stal gant 10 lodenn diwar 2.010 lodenn en embregerezh. Ar bloaz war-lerc’h, tri deiz a-raok an Nedeleg, ez a an tri Nagat da di an noter gant François ha Myriam Le Bihan. Gwerzhañ a reont tout o lodennoù, pe dost, d’an holding FLB, François Le Bihan en e benn.

SCEA ar Point du jour a denn d’ur wastellenn. Un tamm bihan evit Thierry, ha kemend-all evit Didier ha Bertrand. Lipousoc’h eo François ha Myriam Le Bihan o do ur pezh tamm pep hini. E fin ar gont eo an holding FLB a viro ar

wastellenn en he fezh koulz lavaret. Tammoù bihan ar vreudeur Nagat zo ken moan ma ‘z eo bet diaes troc’hañ anezho, ha koulskoude ez int a-bouez. A-drugarez dezho n’hell ket ar Safer mont a-enep d’an dasparzh, na d’ar priz gwerzhañ. N’hell ken nemet sellet ouzh Le Bihan o lipat e vizied goude bezañ debret ar wastellenn a-bezh, pe dost.

E miz Here 2019 e oa bet echuet gant ar werzh, pa oa 58 vloaz Bertrand, an hini yaouankañ anezho. Ar re Nagat hag ar re Le Bihan a zistroas da di an noter a-benn klozañ an traoù. Thierry, Didier ha Bertrand a werzhas neuze div lodenn pep hini d’an holding FLB. François Le Bihan zo e penn an atant desaverezh ha tout al lodennoù zo aet gantañ, alese 243 hektar ouzhpenn gant e stal.

Gant an amzer hag a feur ma veze prenet atantoù gantañ e oa deuet François Le Bihan da vezañ barrek da ober an taol.

E nevez-amzer ar bloaz 2021 e kresk c'hoazh e dachenn gant 160 hektar adarre ha lonkañ ti-feurm an amezeg tost. Dindan tri miz hepken e oa graet an taol. N'en deus ket respontet François Le Bihan d'hon c'houlennoù.

BARREK AN DESAVERIEN MOC'H DA VERNIAÑ TACHENN

An doare-se da ober zo anavezet mat, ha displeget gant dielfennadenn ar gwerzhioù douar e 2021, embannet gant kevredad broadel ar Saferioù³ : « *An aliesañ e vez div werzh daou vloaz diouzh renk : 45 % eus ar gwechoù e vez evel-se* » ha resisaat a ra pelloc'h : « *gwerzh lodennoù ur c'hevredad n'eus ket da vezañ liammet gant un treuzkas er familhoù met kentoc'h gant ur c'hemer perzh diavez..* »

Ar strollad Le Bihan zo unan eus an tiez-feurm brasañ e Breizh. Ha n'emañ ket e-unan gant muioc'h eget 1.000 hektar, ha n'eo ket an hini neme-tañ ken nebeut o prenañ lodennoù evit brasaat kuit d'ar Safer da c'houzout. Un doare boutin eo e gwirionez. N'omp ket evit mirout menegiñ Laurent Dartois en Aodoù-An-Arvor. Hemañ zo perc'henn war 800 hektar tachenn da nebeutañ hag 11 embregerezh en e anv. Ar memestra gant Dominique Kerdoncuff e Bro-Leon, erru tost mil hektar gantañ hag 8 embregerezh di-sheñvel ; eus an SCEA d'an SCI, en ur

dremen dre ar GFA. En Il-ha-Gwilun eo Michel Crespel hag e zaou vab Romain ha Philippe zo erru tost da 600 hektar ganto, met ar frammoù zo disheñvel, meur a holding, unnek SCEA, seizh SCI ha 33 embregerezh en holl. An hini neme-tañ eo Michel Crespel en deus respontet d'hon c'houlennoù. Lâret eo bet gantañ ne oare ket pet devezh-arat a zo gantañ. An arc'hant gounezet eo ar pezh zo pouezus dezhañ.

François Purseigle ha Bertrand Hervieu, sokiologourien anezho o doa embannet al levr *Une agriculture sans agriculteurs / Labour-douar hep labourerien-douar*⁴ e 2020. « *Seizh ti-feurm diwar dek o tesevel moc'h a vez tiez-feurm bras.*

Dek vloaz zo c'hoazh e oa an tiez-feurm etre, na bras na bihan, ar re a oa brasañ o niver e Breizh, ar re « vras » zo bremañ 37% eus an tiez-feurm e Breizh. »

« An arc'hant gounezet eo ar pezh zo pouezus din »

An enklaskerien a ziskoach ivez eo an hentad o sevel moc'h e lec'h ma vez ar muiañ a holdingoù, kevredadoù merañ ar madoù gant dek embregerezh labour-douar ha stummoù lies da vezañ disklêriet. Er rumm-se emañ Le Bihan, Dartois, Kerdoncuff pe c'hoazh Crespel. Desaverien moc'h ez int tout. « *Ar wirionez-se a vez nac'het alies, met ur skeudenn eo eus al labour-douar hep labourerien-douar o tont war wel, pe c'hoazh meret gant pennoù embregerezh pell eus ar skeudenn a vez eus al labourer-douar*

3] *Le prix des terres, analyse des marchés fonciers ruraux 2021*, p20, Bodadeg broadel ar Safer

4] *Une agriculture sans agriculteurs*, p71, François Purseigle et Bertrand Hervieu, éditions SciencesPo Les presses, 2022



e penn an ti-feurm familh », a zispleg an enklaskerien

TIEZ-FEURM BRASOC'H HA DIAESOC'H DA DREUZKAS

« E rannvroioù zo evel e Breizh ma zo kalz desaverezh hag un argerzh strollañ sklaer, ez eo digresket an niver a diez-feurm etre o ment, 40% nebeutoc'h 'z eus anezho etre an div niveradeg diwezhañ. », e 2010 ha 2020. Ha displegañ a ra François Purseigle ha Bertrand Hervieu, sokiologourien anezho, an dra-se en o levr *Une agriculture sans agriculteurs* ⁵.

Tiez-feurm brasoc'h brasañ gant doareoù da sevel anezho luzietoc'h luzietañ. Hag evel pa vez sachet dour eus ur penn ha ne gaver ket eus ar penn-all ken, ez eo an tiez-feurm hiniennel a

gaver nebeutoc'h nebeutañ diouto. « Ar senario zo bremañ a zo hini rastellerezh an douaroù war goust an dud war ar renk d'en em staliañ » eme an danevell parlamant⁶. Kevread vroadel ar Saferioù⁷ a lavar kemend-all, techet eo « mont davet kresk hag astenn an tiez-feurm a zo diouto kentoc'h eget kaout labourerien-douar nevez oc'h en em staliañ. Ma kendalc'h al luskad-se gant kresk an niver a dud o vont war o leve, eo tres al labour-douar gall met ivez ar vuhez ennañ an hini a c'hell bezañ kollet. »

Gant embregerezhioù labour-douar brasoc'h brasañ e teuont da vezañ re vras ha re ger evit bezañ gwerzhet d'ul labourer-douar, da zaou memes ez eo re start. Aozadur al labour en tiez-feurm a cheñch ivez. Eiltretiñ a vez muioc'h mui

5] *Une agriculture sans agriculteurs*, p72, François Purseigle et Bertrand Hervieu, éditions SciencesPo Les presses, 2022

6] *Rapport sur la proposition de loi portant mesures d'urgence pour assurer la régulation de l'accès au foncier agricole au travers de structures sociétaires*, p7, Jean-Bernard Sempastous o kaozeal e anv komision aferioù ekonomikel, Bodadenn vroadel, miz Mae 2021

7] *Le prix des terres*, p14, diell Bodadeg broadel ar Safer, 2021

ha gwelet e vez an dra-se gant an embregerezhioù labour-douar, pe ETA⁸. E Breizh ez eus 850 e 2023, ha 6.000 a dud o labourat enno. An desaverien o deus ezhomm muioc'h muiañ lezel labourioù ar parkeier ganto ha chom buket war an desaverezh.

Eiltretiñ gant ETAoù hag ober war-dro an desaverezh a zo abeg ar cheñchamant-mañ. Met n'eo ket an displegadenn nemeti. Lezel lod all da ober al labour a c'hell bezañ displeget ivez « *gant an diaesteroù treuzkas hag ad-tapout stalioù brasoc'h gant muioc'h a arc'hant postet er c'hevala.* », eme ur studiadenn e 2020⁹, ken eo deuet war wel ur vicher nevez e bed al labour-douar : al *land manager*, pe merour parkeier. Met n'eus ket anv eus se e Breizh c'hoazh eme ar sokiologour François Purseigle.

AL LABOUR-DOUAR FAMILH A ZALC'H

SOUVERENIEZH AR BOUED

Pa c'houlenner digant rener Safer Breizh, Thierry Couteller, perak e fell dezho e vefe muioc'h a dud oc'h en em staliañ ha perak harpañ al labour-douar familh e ra anv eus ar Broadoù Unanet¹⁰ : « *Lavarout a reont ez eo al labour-douar*

familh an hini solutañ, barrekañ da dalañ ouzh enkadennoù an hin met barrek ivez da dalañ ouzh ar cheñchamantou ekonomikel. An doare-se zo ar gwellañ hini da stourm ha degas a ra lañs ha statijenn war ar maezioù. Pa vez ul labourer-douar oc'h en em staliañ e teu 7 post-labour da heul. Familhoù int ivez, bugale, skolioù, stalioù, servijoù a zeu da heul. Souvereniezh ar boued eo ivez. Gant al labour-douar gant

meur a embregerezh ez eo an arc'hant postet an hini a gont da gentañ penn. Ar pezh zo e-barzh ho asied n'eo ken nemet un dra a eil. Difenn a reomp al labour-douar familh rak ez eo an hini barrekañ evit difenn sou-

vereniezh ar boued evitomp-holl. »

Labour-douar ar firmoù eo pa ne vez ket al labour-douar etre daouarn al labourerien-douar o-unan. Ar giz-se ne vez ket gwelet kalz e Breizh evit poent, met hervez kazetennerez Lucile Leclair¹¹, ez eo ret bezañ war evezh. Kemer a ra skouerenn istor ur werzh aet gant ur strollad industriel breton. An embregerezh, Altho, eus Breizh, eo an eil brasañ war ar marc'had evit gwerzhañ chips e Frañs. Staliet eo e Sant Jelan er Morbihan, ha prenet pevar zi-feurm gant ar gwerzher chips pa oa aet al labourerien-douar war o leve. Ur wech prenet an tiez-feurm-se

8] ETA : entreprises de travaux agricoles

9] « Fragmentation du modèle de l'exploitation familiale et nouvelles structurations des relations capital-travail-foncier en agriculture », p5, *Agronomie environnement et sociétés*, P Jeanneaux, F Purseigle, L Bodiguel, B Hervieu, miz Kerzu 2020

10] *Agriculture familiale, notenn eus ar justis*, FAO, S. Blondeau ha A. Korzenszky, miz Meurzh 2022

11] *Hold-up sur la terre*, Lucile Leclair, édition Seuil, 2022


n'eus ket douar evit al labourerien-douar ken pa int aet gant Altho. Anzav a ra rener an embregerezh, Laurent Carvard en un atersadenn er gazetenn *Libération*, « *n'eus ket deuet da soñj deomp* » eus dalc'h ar staliañ labourerien-douar.

Koulskoude ez eo lakaet diaes patrom ar gounezerezh familh aliesoc'h aliesañ. Etre 2010 ha 2020 e oa bet lieskeimentet dre 2,5 an niver a diez-feurm gant muioc'h eget 200 hektar e pep departamant e Breizh. 200 hektar zo teir gwech ment un ti-feurm, dre geidenn pa'z eo e-tro 62 hektar e Breizh pe 124 devezh-arat.

N'eo ket klok an daolenn. Renabliñ a ra an atantoù unan hag unan. Ar gorread zo liammet gant sez un atant. Koulskoude e lak war wel an holdingoù labour-douar o deus François Le Bihan, Dominique Kerdoncuff, Michel Crespel pe c'hoazh Laurent Dartois ez eus doareoù da sevel kevredadoù gant meur a embregerezh liammet an eil re gant ar re all. En ur lakaat an tammoù an eil gant ar re all e teu war wel an tachennoù ha pegen bras eo ti-feurm ar « *strolladoù labour-douar* ». 1.000 hektar ha muioc'h pe 2000 devezh-arat ha muioc'h. Pet zo dioute ? Pet strollad

HIZIV EZ EUS DIV WECH MUIOC'H A DIEZ-FEURM GANT 400 DEVEZH ARAT EGET 10 VLOAZ ZO

O keñveriañ ment ar menajoù e-tre 2010 ha 2020



Mammenn : Renabliñ an tiez-feurm 2010 ha 2020, servij statistikou an Draaf

12] « Dans le Morbihan, un industriel barre la route aux jeunes agriculteurs », *Libération*, J. Lallouët-Geffroy, miz C'hwevrer 2023

labour-douar zo perc'henn war kemend-all ha pet gant 1.000 hektar douar da labourat e Breizh ?

Savet hon eus ar goulenn ouzh Safer Breizh : « *Ne ouzomp seurt ebet.* » Savet hon eus ar goulenn ouzh DDTM¹³ Aodoù-an Arvor : « *N'emañ ket ar sifr ganeomp, n'ouzomp ket pet labourer-douar o deus pe a labour muioc'h eget 1.000 hektar, ha n'hon eus ket bet gwelet biskoazh aotreoù evit tiez-feurm a-seurt-se.* » Savet hon eus ar goulenn ouzh an

Draaf¹⁴ : « *An ditour war ar gorread hon eus zo hini sez pep ti-feurm. Diouzh an elfennoù-se emañ tout an tiez-feurm pell dindan 1.000 hektar tachenn mat da labourat.* » Daoust ma eo deuet ar stourm a-enep rastellerezh an douaroù eus ar re gentañ, servijoù ar Stad a nac'h renabliñ anezho. Hep renabl n'haller ket komz eus rastellerezh pa n'eus ket « roud » ebet diouto ez ofisiel.

Julie Lallouët-Geffroy

13] Direction départementale des territoires et de la mer (DDTM) | Renerezh-departamant an tiriadoù hag ar mor (RDTM)

14] Direction Régionale de l'Alimentation, de l'Agriculture et de la Forêt (DRAAF) | Renerezh-rannvro ar boued, al labour-douar hag ar c'hoadeier (RRBLK)

Boest Du

Da ober tro strolladoù labour-douar François Le Bihan, Dominique Kerdoncuff, Laurent Dartois ha Michel Crespel, hon eus implijet diazoù roadennoù publik diwar marilh ar c'henwerzh hag ar c'hevredadoù evit renabliñ tout an embregerezhioù emaint er penn anezho. Sellet hon eus da c'houde ouzh roll ar re o devez ar PAC a-benn kaout ar sammadoù arc'hant roet d'an embregerezhioù diouzh ment o zachenn. Ar skoaziad d'ar gorread, an DPB (*Droit au paiement de base/ gwir d'ar paeñ diazez*) pe ar gwir d'ar paeñ diazez a vez e-tro 114€/hektar. Diwar ar sammad-mañ hon eus jedet pegen bras eo an tachennoù o deus. N'eo nemet ur brasjed adalek roadennoù publik a c'heller kavout. An Draaf en devez titour resisoc'h ha gallout a rafe reiñ sifroù klokoc'h.

An enklask-mañ a studi politikerezh rannvro al labour-douar ha setu perak omp chomet gant roadennoù pevar departamant rannvro Breizh hepken ha n'emañ ket roadennoù Liger-Atlantel e-barzh siwazh. Evit derc'hel kont eus an departamant-se ivez e vije bet ret deomp donaat ha furchal e politikerezh labour-douar broioù al Liger, a didouezañ ar roadennoù departamant al Liger-Atlantel, kavout poentoù a c'hellfed keñveriañ ha degas un dielfennadenn hollek evit ar pemp departamant. Ur garg labour ouzhpenn e oa hag ur riskl bras d'en em goll, alese hon doa dibabet ne oamp ket evit sammañ ar garg labour-se.

AR SAFER, BENVEG MERGLET MERAÑ GWERZH AN DOUAROÙ

Ar Safer zo mestr war gwerzh ar parkeier e Frañs. Erru eo skuizh koulskoude pa ne zeu ken a-benn da virout ouzh rastellerezh an douaroù labour-douar, na da staliañ 1.000 labourer-douar ar bloaz, evel ma fell da Rannvro Breizh. « Brokerezh ar sindikadoù » zo un harp d'ar giz kreskiñ hag astenn tiez-feurm ha diaesoc'h e vez d'ar re nevez d'en em staliañ.



- 】 Ar Safer n'hall emellout nemet war un hanter a-boan eus ar gwerzhioù tachennoù labour-douar e Breizh.
- 】 Mirout a ra ur priz izel war an douaroù e-keñver peurrest Europa.
- 】 N'eus ken nemet un den diwar 3 o vont war e leve a ya unan oc'h en em staliañ war e lerc'h e Breizh.
- 】 An tiez-feurm ne reont nemet kreskiñ : 14 hektar muioc'h evit pep hini dre geidenn, en ur ober 10 vloaz.

An douaroù labour-douar zo un dra bennak a denn d'ar galon », a ziverr rener Safer Breizh, Thierry Couteller. An douaroù zo ur benveg produiñ gant un dalvoudegezh arc'hantel ha war an dro ez int savet diwar rummadoù a labourerien-douar bet o labourat anezho. Ar Safer a vez e kreiz : bezañ sur e vo ar priz reizh, soursial e vo adkemeret an douaroù, dibab ar stumm ekonomikel hag an doare labour-douar evit an dud oc'h adkemer douaroù hag evit ar re oc'h en em staliañ, met ivez tremen hebiou ha mirout ouzh un den n'hellfe ket gouzañv ar gwerzher prenañ. Degouezhiou a c'hall sevel reuz.

Gwerzh ti-feurm saout-laezh Fabrice ha Françoise a oa tres bezañ sklaer ha didroc'h. E 2014, an ti-feurm gant un daou-ugent buoc'h-laezh a oa war-nes bezañ gwerzhet. Fabrice ha Françoise, gant sikour o merc'h henañ, Stéphanie, o doa kavet daou labourer-douar eus ar c'horn-bro evit adkemer o 50 hektar, en o zouez David, amezeg dezho. Ar c'houplad a zibab tremen dre ar Safer¹ an aozadur e karg merañ priz an tachennoù labour-douar e Bro-C'hall. Gallet o dijent tremen dre an noter evit sinañ ur werzh dre gaer, met evito a oa ar Safer bezañ sur e vefe kaset ar werzh diouzh ma vez dleet gant al lezenn. « *Pep tra a oa mat, ha badadao* », he deus


soñj Stéphanie, o merc'h. Emstrivadur David zo nac'het, rak ne oa ket asant an ti-bank gantañ. Ar Safer he deus kavet unan all : Erwan. Ar werzh a c'halle bezañ diouti. Met Fabrice ha Françoise ne fell ket dezho klevet kaoz eus Erwan, un amezeg n'int ket evit gouzañv. « *Tout met ket da hennezh* », Françoise a ya gant he c'harr betek ti hemañ kerkent evit cheñch e soñj dezhañ. Ar verc'h hag ar mab-kaer ac'h erru ivez. Ha bec'h a oa ken a oa eno, trouz, huchadeg. Un emzalc'h gourdrouzus, boaz e metoù al labour-douar. [*Lennit trede rann an enklask « Feulster gwerzh an douaroù »*]. Erwan ne lavar seurt, ne bleig ket.

« An douaroù labour-douar zo un dra bennak a denn d'ar galon »

Ar Safer he deus troc'het an tabut, eñ an hini ac'h adtapo an douaroù. Serge Le Gall, kuzulier war ar font d'ar c'houlz, e karg eus an teuliad en deus dalc'het soñj : « *Ar perc'henn en doa bet c'hoant nac'hañ sinañ ar*

werzh. » Fabrice a ra e seizh gwellañ da lakaat an traoù da ruzal, kuzhat lizhiri an noter, al lizhiri kaset dezho en dro. « *Met n'halle ket nac'hañ, ur wech aet gant ar Safer e oa ret dezhañ doujañ ar gevrat*. » Kuzul teknikel ar Safer a vod evit pep departamant un dek dileuriad bennak eus ar vicher ha tud eus ar maez a-benn sellet a-dost ouzh an dud war ar renk evit prenañ douar hag aotren, pe get, gant ma kloto gant palioù an takad. Raktresoù zo a vez lakaet da vezañ a-us

1] Ar gevredigezh aveadur ar font ha staliañ war ar maez pe *Société d'aménagement foncier et d'établissement rural*



d'ar re-all. Da skouer e vez staliañ ul labourer-douar nevez er renk kentañ war un astenn d'un ti-feurm. Unan eus kefridioù an ensavadur zo stourm a-enep ar c'hreskoù re vras ha re stank, ha harpañ ar staliañ en ur stourm a-enep d'ar brokañ war an douaroù.

Gwerzhet e oa bet ti-feurm Fabrice ha Françoise e 2015. « *Gwerzhañ ti-feurm ar familh a oa start, gwerzhañ anezhañ d'an den-se a oa gwashoc'h eget tout, a gont Stéphanie. Ma zad n'eus ket gouzañvet. Ne oa ket ar memes hini ken. Kroget e oa da evañ dre guzh.* » Marvet eo e 2020 diwar ur sirroz, pemp bloaz goude ar werzh, e ospital ar Gazeg Wenn e Brest. 61 bloaz e oa.

Fabrice en dije gallet ober ur werzh a-gaer war-eeun e ti an noter, an doare a zibab un toullad mat a labourer-douar kuit da gaout emellouriezh.

Darn eus al labourer-douar a ya pelloc'h c'hoazh a-benn tremen hebiou d'ar Safer, na pa vefe ret sevel frammoù diouzh ar gwir luziet-mat.


KLEMM DIOUTI E FRAÑS MET AVI A RA EN EUROPA

Ar Safer a oa bet krouet e 1960 gant ar youll gwareziñ an takadoù labour-douar, an takadoù naturel, ar c'hoadeier ha reiñ-lañs d'al labourer-douar d'en em staliañ.² Ar gefridi gentañ zo merañ priz an douaroù evit ma c'hello ar re o kregiñ gant ar vicher prenañ. Ha mont a ra en-dro. Hervez Eurostat³, e 2021, priz an hektar e Breizh zo e-tro 5.920€ dre geidenn. En Izel-vroioù e c'hell koustañ ouzhpenn evit 91.000€ an hektar. Ar prizioù an izelañ e Europa zo er Reter : e Kroasia ha Bulgaria e-tro 3.000€. En Italia e oa

2] Reolennoù lezenn evit al labour-douar hag ar pesketa, war lec'hienn internet Legifrance.gouv.fr

3] Priz an tachennoù labour-douar a bep rannvro, Eurostat, 2022

N'EUS KET KALZ A C'HALLOUT GANT AR SAFER



Source : Safer, Draaf

gwerzhet an douaroù 34 000€/hektar dre geidenn, e 2020.

E Frañs emañ ar Safer e pep rannvro. Gallout a ra merañ ur werzh diwar goulenn ar gwerzher, evel ma oa bet evit Fabrice. Gallout a ra kemer perzh en ur werzh ivez. Adwelet ar priz ha lakaat anezhañ diouzh ar marc'had, a-benn harpañ tud d'en em staliañ, pe c'hoazh da virout ouzh un atant da zont da vezañ re vras. An aozadur a c'hall dre-gaer pe dre-heg ober un taol eus ar c'hentañ : kentpreañ, pe preamptiñ ma fell deoc'h. Neuze e torr ar Safer ar werzh ha hi a ra war-dro pep tra, a-enep da c'hoant ar gwerzher hag hini ar prener. Gallout a ra preañ douaroù ivez hag adwerzhañ anezho diwezhatoc'h d'an hini war ar renk a fello dezhi.

En desped da se n'eo ket ar Safer an aotrou doue war marc'had an douaroù labour-douar. Nebeut-tre ec'h emell e gwirionez. Diwar un 40.000 hektar parkeier gwerzhet e Breizh e 2022, ne c'hall ar Safer emellout nemet war 24.000 hektar hepken, ar peurrest zo er-maez eus he barrezhioù. E gwirionez n'eus lakaet he fri er gwerzhioù mann nemet evit ur 5.600 hektar ben-nak warlene.

UR MARC'HAD DOUAROÙ E-KICHEN AN HENTOÙ-ALL

Ar Saferioù : diheñchadurioù ur benveg politikerezh / Les Safer : les dérives d'un outil de politique⁴, zo titl un danevell gant Lez ar c'hontoù e 2014. Dalc'het vez soñj ennañ eus ar pezh a lak war wel Lez ar

4] *Les Safer : les dérives d'un outil de politique d'aménagement agricole et rural*, diell Lez ar c'hontoù, p18, miz Ebrel 2014

c'hontoù tregont vloaz zo dija: re vras eo pouez ar sindikadoù labour-douar er Safer. Daoust d'ar strivoù, « e chom mererezh ar Safer dindan gazel-ge bed al labour-douar, dreist-holl hini ar sindikad pennañ (an FNSEA). »

Kement-mañ a lavar deomp ivez ur sterniad bet e Safer Breizh : « Er bloavezhioù 1980 e oa boadaoù teknikel ar Safer mignoned da vat. An troidellerezhioù, emglevioù kenez-trezo a oa etre an dud hag ar galloudoù lec'hel, ha gallout a raent dibab int-i o unan, ha ne oant ket niverus o choaz penaos e veze dasparzhed an douaroù. Hiziv an deiz, en deus kontrollerezh ar Stad muioc'h a bouez kalz. »

Start e vez cheñch ar boazioù. Pemp devezh a-raok un emvod bodad teknikel e kaser an alioù d'an izili. Unan anezho a gont deomp : « En em rentañ a reer kont mat en deus galvet an FNSEA hag ar Safer an eil re ar re all, rak ur wech erru en emvod, eo kendoniet o arguzennoù en a-raok. Sur eo en deus ul levrezon war an dibaboù graet. »

An douaroniour Adrien Baysse- Lainé enklasker er CNRS eskol-veur Grenoble Alpes, a lavar deomp e berr gomzoù : « Ar Safer a chom merkoù ganti eus un arvalerezh⁵ sindikad. War baper ne vez ket gwelet muioc'h a dud eus ar sindikad pennañ eget se, met er fedoù geo. Dileuridi eus an FNSEA a vez dilennet e kuzulioù-merañ

« Tri diwar ar pevar prezidant bodad teknikel er Safer a zo er FNSEA »


Groupama, ar c'hCrédit agricole, e Kambr al labour-douar. War-lerc'h e vezont dilennet gant kuzul-merañ an aozadurioù-mañ evit mont e-barzh ar bodadoù teknikel er Safer. » Alese e kaver ez eus tri diwar ar pevar prezidant bodad teknikel er Safer a zo ezel eus an FNSEA. Lod zo dilennet e Kambr al labour-douar⁶, meret ivez gant an FNSEA.

En ur studiadenn⁷ bet embannet e 2022 e ya Adrien Baysse-Lainé dre ar munudoù gant ar c'hoarioù-se. « Ar c'hazetennoù sizhuniek departamant, embannet gant an FDSEA a oa ar re nemeto a oa aotreet da embann kemennadennoù lezennel ar Saferioù, ouzhpenn ar skritel-laouiñ en tiez-kêr, ne vez tennet splot outo

5] Clientélisme e galleg

6] « Agriculture : la FDSEA se veut « au service de tous », Ouest-France, miz Genver 2013

7] Vers un accès au foncier plus inclusif pour les néo-agriculteurs, Adrien Baysse-Lainé, Érès « espaces et sociétés », 2022



*AOTRE LABOURAT AN DOUAROU

JEAN LEVEUGLE - LES SAVOIRS AMBULANTS

nemet gant rouedadigoù bihan lec'hel-tre. » Ar c'hemennadennoù bihan a vez ar gwellañ doare da c'houzout petra zo da werzhañ. Hep ar c'heleier-se, n'haller ket ober e doull. Abaoe 2016 ha lezenn dazont al labour-douar e vez embannet ar c'hinnigoù-se war ar genrouedad ivez, ar pezh a lak ar marc'had da vezañ sklaeroc'h un tamm.

Se a lavar Thierry Couteller, rener ar Safer e Breizh ivez. « Reiñ a reomp da c'houzout tout ar c'hemennoù gwerzh d'ar sindikadoù ha d'an dileuridi lec'hel, ha kement-mañ abaoe un dek vloaz ben-nak. An dileuridi-lec'hel a ro da c'houzout ar c'hemennoù da izili ar sindikad ha da

labourerien-douar o c'horn-bro, ma fell dezho. Ne vez ket ret dezho hen ober. »

An FNSEA a oa bet krouet e 1946 hag e-pad pell e oa ar sindikad nemetañ. Alemañ eo bras ar rouedad dileuridi lec'hel, barrek da reiñ da c'houzout d'an izili ar c'hinnigoù gwerzh. Ne vez ket kont e-giz-se gant ar sindikadoù-all, n'int ket ken kozh ha n'eus ket kement anezho er vro. Ar c'hConfédération paysanne a oa bet savet e 1987, ar c'hCoordination rurale e 1992. Bezañ ezel eus ur sindikad zo digeriñ an nor d'ar rouedad kemmenadennoù ha taolioù-kaer da ober evit prenañ douaroù. Ha setu an dalc'h evit Chantal,

60 vloaz, o chom en Aodoù-an-Arvor. Emañ o klask tachenn bloavezhioù zo evit he saout-laezh. Estonet eo na wel kemennadenn gwerzh ebet biskoazh. Gervel a reas ar Safer, hag ar Gembr labour-douar da heul hag a-benn ar fin an FDSEA. Ha setu an den er pellgomz ha displegañ dezhi eo ret dezhi bezañ ezel eus ar sindikad evit resev ar c'hemadennoù. Chantal, o tesevel loened daou-ugent vloaz zo a blij he labour dezhi « *met ne ra ket bed al labour-douar e lec'h ma vez ret ober van bezañ kamarad gant hemañ-hen, mont gant ar sindikad mat.* »

1.000 NEVEZ STALIET BEP BLOAZ, UN HET EN ANER

Ar re a ya war o leve n'o deus ket ar pal treuzkas o menaj d'ul labourer-douar, met gwerzhañ ar gwellañ, ar c'he-rañ. Alese e c'hell « *kas, a-wechoù, da harpañ ar werzh d'ul labourer-douar staliet mat ha kreskiñ un atant, kentoc'h eget harpañ unan yaouank oc'h en em staliañ.* », eme Lez ar c'hontoù⁸ en un danevell eus miz Ebrel 2023.

Ar Safer a lavar kemend-all⁹ : « *Aesoc'h eo, primoc'h eo ha gwelloc'h priz eo gwelet gant « un amezeg » evit adtapout ur*

sammad arc'hant, ar brasañ ar gwellañ, peogwir eo re izel al leve. »

Ar stadegoù a ziskouez ar memestra : Breizh he deus kollet ur c'hard eus e diez-feurm dindan dek vloaz¹⁰. N'eus ken nemet tost da 26.000 menaj ken e Breizh. Kreskiñ a ra o ment, 14 hektar brasoc'h dre geidenn, ha savet e vez frammoù gant al lezenn luzietoc'h luzietañ. En he danevell embannet e 2023¹¹, e tispleg ar gevredigezh Terre de liens penaos e tro an traoù ha muioc'h muiañ a embregerezhioù arc'hant bras, en o zouez lod n'eo ket labourerien-douar darn eus ar gevelourien, betek « *un drederenn eus an embregerezhioù n'int ket meret gant kevelourien o labourat an douar* ».

An doare da sevel an embregerezhioù a vez diwar al lezenn hag an arc'hant miuoc'h muiañ, hag an treuzkas diaesoc'h diaesañ. Evit en em staliañ e vez

ret prenañ douar, loened, dafar, savadur. Dre vras e vez ezhomm kaout 270.000€ gant pep kevelour hervez Kembr labour-douar Breizh¹². Diouzhtu ma 'z eer gant stummoù luzietoc'h gant kalz tachenn hag obere-

rezhioù-all evel ur metanizer, e vez kalz uheloc'h c'hoazh ar c'houst [*Lennit hon enklask diwar-benn ar metanaat*].

**Bezañ ezel
eus ur sindikad
zo digeriñ
an nor
d'ar rouedad evit
prenañ douaroù.**

8] *La politique d'installation des nouveaux agriculteurs et de transmission des exploitations agricoles*, p84, Lez ar c'hontoù, miz Ebrel 2023

9] *Le prix des terres*, p14, diell bodadeg broadel ar Safer, 2021

10] *La Bretagne perd un quart de ses exploitations en dix ans, mais conserve sa surface agricole*, Agreste, miz Kerzu 2021

11] *La propriété des terres agricoles en France*, p48, diell eus Terre de liens, 2023

12] *Création, reprise transmission, les chiffres clefs 2022*, p20, diell kembr labour-douar Breizh, miz Mae 2023

N'eus ken nemet un den diwar tri o vont war e leve gant unan o tont d'en em staliañ war-e-lerc'h e Breizh. Nevesadur ar remziadoù a c'hall bezañ gwelet el liseoù labour-douar. 14 % a skolidi nebeutoc'h en dek vloaz tremenet¹³. An digresk niver a labourerien-douar ha tiez-feurm ne erru ket dre zegouezh met dilerc'h « *ur politikerezh a oa gant ar palioù modernaat bed al labour-douar ha produiñ muioc'h gant sikour ar mekanikoù ha gwelloc'h fonnuster ; al luskad-se a gas digresk an niver a labourerien-douar oberiant hag an niver a diez-feurm, en em c'houlenner bremañ daoust ha ken-koulz se eo* », a zo skrivet e danevell Lez ar c'hontoù¹⁴. Evit mont a-enep d'al luskad-se he deus c'hoant Rannvro Breizh, gant sikour ar Pac¹⁵, staliañ 1.000 labourer-douar nevez bep bloaz adalek 2028. Div wech muioc'h eget ar pezh zo bremañ.

E Frañs « *eo ar senario gant rastellat an douaroù gant un nebeut re war goust ar re o devez c'hoant d'en em staliañ an hini zo*

kaoz evit an deizioù », ac'h embann digoradur an danevell Sempastous¹⁶ eus bodad an aferioù ekonomikel er Vodadenn vroadel e 2021. « *Pe vez re a atantoù e teu ungounezerezh an douar ha doareoù da labourat o skuizhañ an douaroù. Liesded ar produiñ hag e fin ar gont an emrenezh boued a vez wazh, gant dilerc'hioù war ar vevliesseurtes. Parlamant Europa en doa meneget an dañjer ez eo war ar skouer labour-douar europat¹⁷, diazezet war al labour-douar lies-obererezh, ha dreist-holl war tiez-feurm familh.* »

Met hiziv, ober brud d'ur skeudenn peurvart eus Breizh gant desaverezh ha tiez-feurm 62 hektar a zo un het dibosupl. E gwirionez he deus ar vro un troad e-barzh an atantoù bras, erru ouzhpenn 1.000 hektar ganto, gant kevredadoù merañ pe holdingoù labour-douar ma vez kalz a ijin diouzh al lezennoù evit ober ar muiañ gounid arc'hant eus an douaroù.

Julie Lallouët-Geffroy

13] *Ouverture des États généraux de l'installation et de la transmission*, pennad d'ar gazetennerien kaset gant Rannvro Breizh, mis Here 2021

14] *La politique d'installation des nouveaux agriculteurs et de transmission des exploitations agricoles*, p17, Lez ar c'hontoù, miz Ebrel 2023

15] *Politique agricole commune pe Politikerezh Boutin Labour-Douar*

16] *Rapport sur la proposition de loi portant mesures d'urgence pour assurer la régulation de l'accès au foncier agricole au travers de structures sociétares*, p7-8, Jean-Bernard Sempastous Sempastous o kaozeal e anv komision aferioù ekonomikel, Bodadenn vroadel, miz Mae 2021

17] *Modèle agricole européen e galleg*

PROMETIÑ, TOUIÑ, HA SALUDIÑ : FEULTSTER GWERZH AN DOUAROÙ

An douaroù mat da labourat n'haller ket kaout ouzhpenn ma n'eus dioute. A-benn kaout an tachennoù a vez c'hoant da gaout e vez ret ober e doull e-touez ar re-all. Pellgomzadennoù ingal, gourdrouzioù, ober aon, dispriziañ, abafaat, pep tra zo aotreet evit lakaat a-gostez unan-all zo war ar renk. Met ret eo chom didrouz kuit da servijoù ar Stad dont da ober war-dro...



JEAN LEVEUGLE - LES SAVOIRS AMBULANTS

- 】 Niverus eo an dud bet test d'ar gourdrouzioù, d'ar gwask lakaet warno ha d'an abafamant graet dezho pa oant o vont d'en em staliañ.
- 】 Servijoù ar Stad ne reont nemet gortoz war-lerc'h an amezeien a-raok mont da gontrolliñ.
- 】 Ar Stad n'hall emellout nemet evit un doser diwar pevar.
- 】 Hervez an enklasker Ali Romdhani, ez eo boutin ober aon ha diouzh ar sistem ez eo e bed al labour-douar.

Lâret e vije bet un taol-trap. » An deiz-se ne oa ket Valérie o pabourat. C’hoant he deus d’en em staliañ gant loened hag emgav he doa gant ur perc’henn a fellfe dezhi prenañ douar digantañ. Estonet e voe : daou labourer-douar-all a oa eno ivez. C’hoant o deus da gaout an douaroù se ivez. Ha pa oa Valérie war ar renk evit 30 hektar e c’helle se lakaat ar plañioù graet ganto da vont a-dreuz. Evit-se e oant amañ. « *Lavaret o doa din e oa ret din tennañ ar goulenn aotren labourat, a-hend-all e rafent brud fall din.* » Ha ne ouie ket petra oa da zont war-lerc’h c’hoazh.

Tri bloaz a-raok e oa birvilh enni. Goude bezañ bet o labourat evit ar velestradurezh e oa krog hi, merc’h d’ul labourer-douar, gant ur vuhez vicherel-all ha mont da sevel saout-laezh.

Gouzout a oar e vez ret a-raoken em staliañ mont da welet ar berc’heien douaroù da werzhañ. Ha se emañ oc’h ober. Mont a ra da welet unan, kontañ dezhañ petra emañ e soñj ober. A-drugarez d’an 30 hektar-se an hini e c’hello en em staliañ, kaout laezh da werzhañ gant 30 buoc’h-laezh ha gwerzhañ da veur a hini. Ur soñj klasel a-walc’h, a glot gant stumm labour-douar ar vro. N’eo ket ken sur ha se marteze « *Pa vez re vihan ar pezh a soñjer ober e soñj d’ar re gozh n’eo ket gwir labour-douar.* » Met tremen a ra mat an traoù, ar perc’henn, a yelo pres-tik war e leve a lavar dezhi eo mat. Gant

se zo un emglev evit Valérie ha mont a ra ganti.

En ur ober ur bloaz ez a d’ul lise labour-douar, tapout a ra an diplom, ober a ra ar staj ret dezhi ober, paeañ a ra ur studiadenn a-benn gouzout pe-gen padus eo ekonomiezh he raktres. Heuliañ a ra Valérie kement pazenn da ober diouzh ar pezh a lavar ar Gambr labour-douar. Ur wech prest pep tra, e 2022 e c’halv an danvez desaverez ar perc’henn. Met a-benn neuze en deus cheñchet e soñj ha choazet daou saver saout-laezh-all da adkemer an douaroù war-e-lerc’h.

Ezhomm zo douar hag un aotre labourat an douar.

« *Touellet on bet e-pad ur bloaz* » Pa ne oa ket bet dalc’het kont eus an emlev dre gomz e ra e soñj Valérie ha mont a ra gant an doare ofisiel da ober. Sevel a ra ur goulenn

aotren labourat an douar. Mont a ra war ar renk eta evel an daou-all, bet lavaret dezho ez afe an douaroù ganto.

An aotre se zo ret evit gallout labourat ur park, pa vefe evit loened pe trevadoù. Evit bleniañ da skouer zo ezhomm ur c’harr hag un aotre bleniañ. Ar memes-tra eo evit al labour-douar, ezhomm zo douar, da feurmiñ pe da brenañ, hag un aotre labourat an douar. Ma n’eus nemet un den war ar renk evit an dachenn e tap hennezh an aotre kerkent. Ma vez meur a hini ez eo ur bodad, ar CDOA pehini a vod servijoù ar Stad ha dileuridi eus ar vicher. En emvodoù e vez studiet pep doser ha pa vez meur a hini war ar renk e ra an dibab en ur harpañ war an



JEAN LEVEUGLE - LES SAVOIRS AMBULANTS

hag esaeañ lakaat anezhi da cheñch he soñj.

Kontañ a ra deomp Valérie he deus galvet Renerezh departamant an tiriadoù hag ar mor², an DDTM, a vez o verañ aozadur ar CDOA, ar bodad e kard fiziañ an aotreoù labourat an douar Displegañ a ra dezho e vez lakaet gwask warni. Lavarout a ra dezho : « Stegnet eo an traoù. » Ne cheñch seurt ebet, kenderc'hel a ra gant ar flapajoù. Derc'hel a ra penn Valérie e-pad pevar miz. E fin ar gont e tenn he goulenn aotre digant an DDTM diwar ar renk. Ar perc'henn en deus bet ar pezh en doa c'hoant da

**« Pa vez re
vihan
ar pezh o
rakstres e soñj
d'ar re gozh
n'eo ket gwir
labour-douar. »**

gaout, ha lakaat a ra Valérie da sinañ ur baperenn a lavar : « N'eo ket bet lakaet Valérie da dennañ he doser diwar ar renk e mod ebet gant ar perc'henn. Valérie hec'h unan an hini he deus kemeret an dibab. »

Daoust hag ez eo di-voaz doareoù-se da ober aon d'an dud ? Gant Ali Romdhani ac'h embannas un dezenn e 2020 diwar-benn ar bec'hioù a vez en desaverezh e Rannvro Breizh, enklaskoù war ar sokiologiezh ma teskriv ar meizad urzh sokial :

« un hollad normoù ha rolloù a lak ar patrom gounezerezh breton a-us da bep tra. N'eo ket un aozadur ofisiel, met kentoc'h un hollad rouedadoù aktourien rouestlet

2] Renerezh departamant an tiriadoù hag ar mor (RDTM) pe Direction départementale des Territoires et de la mer (DDTM)

an eil re gant ar re all, hag ober a reont traoù betek gouzout e c'hellfe bezañ kavet abeg en o interestoù, en o identelezh, en o dreist-gwirioù pe abeg c'hoazh en o boazioù»³. An urzh sokial-se zo diazezet ar mont en-dro anezhañ war « ur sistem digastiz, a lak a gostez, a nac'h kousto pe gousto, a lak gwask war an dud ha kas a ra kontrollerezh ».

Hervez an enklasker : « ober aon d'an dud, ha lakaat gwask a gaver diwar ar sistem. Gant se on bet skoet : a feur e oan bet oc'h atersiñ tud, e oa bet bevet gant kement hini, pa vefent o tont eus bed al labour-douar pe get, gwask hag abafamant a-dost pe a-bell. Un dra bennak a gaver gant kement hini, ingal ». Ali Romdhani a ra anv eus levr-enklask ar c'hazetenner Nicolas Legendre, *Silence dans les champs*⁴, bet embannet e miz Ebrel, e lec'h ma vez puilh an testeni gourdrouzioù e 300 pajennad al levr. Daoust ma lavar Valérie he doa roet da c'houzout d'an DDTM penaos e oa kont, e oa chomet mut servijoù ar Stad. En desped d'hor goulennoù o deus nac'het kaout un tamm kaozeadenn gant *Splann* !.

LABOURERIEN-DOUAR MAEZ-LEZENN

Lakaet e vez gwask war an dud war-eeun, evel m'he doa gouzañvet Valérie, met gallout a reer stadañ ivez ne vez ket

Ober aon d'an dud, a gaver diwar ar sistem.

doujet d'an aotreoù, pa vefent roet pe nac'het forzh penaos. Quentin Sergent zo labourer-douar e Bro-Gerne, staliet eo gant e dud. Loened zo ganto : sevel gwizi, saout-laezh, edeier hag ur metanizer⁵. Quentin Sergent, mab da André Sergent, prezidant Kambr labour-douar Rannvro Breizh ezel eus an FNSEA, ar sindikad brasañ niver gantañ. P'emañ e dad e penn an aozadur labour-douar e Rannvro Breizh en deus klevet kaoz moarvat eus penaos e vez kont pa vez nac'het gant ur pennadurezh an aotre labourat an douar da unan bennak, n'eus ket droed da labourat an douar en dachenn-se. Ha sur-mat e oar peogwir e kemer perzh Quentin Sergent er bodad⁶, hag eñ eiler e CDOA e zepar-tamant, ar bodad a ro an aotreoù da labourat an douar just a-walc'h.

E nevezamzer ar bloaz 2022 e c'houlenn


3] « Les conflits d'usage au cœur de l'élevage breton », p274, skol-veur Roazhon 2, Ali Romdhani, 2020

4] *Silence dans les champs*, Nicolas Legendre, édition Arthaud, miz Ebrel 2023

5] « À Beuzec-Cap-Sizun, le méthaniseur veut s'étendre avec des dispositifs de sécurité renforcés », *Ouest-France*, L. Larvor, Miz Ebrel 2020

6] Diferad-prefed o cheñch roll perzhidi CDOA Penn-ar-Bed, p31, miz Genver 2023

N'EUS KET KALZ A C'HALLOUT GANT BODAD AN DEPARTAMANT



Source : Safer, Draaf

an aotre da labourat an douar evit 16 hektar. Nac'het e oa bet reiñ an aotre dezhañ. N'eus ket miret outañ mont e-barzh ar park. Servijoù ar Stad, dre an Draaf o deus graet trouz dezhañ ha kaset ul lizher redi kuitaat an dachenn a-raok n'afe an traoù dirak al lez-varn. Ur miz en doa evit mont kuit eus ar park, hag aet e oa neuze. Met penaos gouzout daoust hag emañ an aotre gant ul labourer-douar pintet war e drakteur da labourat ar park e lec'h m'emañ ? N'hall ket gwazourien an DDTM ober troioù ingal war kement park zo. Goulennet e vez gant an amezeien teurel evezh. Diwar ditour d'an DDTM ez eont neuze da gontrolliñ, ha ma vez ezhomm ez eo

Servijoù ar Stad a seblant kontañ war flatrerezh an amezeien.

gant lizhiri, telloù-kastiz e vez graet diouzh al lezenn. DDTM Aodoù-an-Arvor a zispleg deomp : « *Peurliesañ e vez an hini a vez war e goust a ya da glemm.* » Penaos gouzout ma 'z a kuit eus ar park da vat ? « *Reseviñ a reomp titour digant an hini a oa war goll, pehini en doa flatret a-raok.* » Servijoù ar Stad a seblant kontañ war flatrerezh an amezeien a-raok mont da gontrolliñ, ar pezh a lak ar geodedourien gant kement a riskl kaout gwall-zistro war-lerc'h, ha n'eus netra el lezenn na doare ebet evit gwareziñ anezho eus se. An Draaf ac'h embann bezañ bet 400 kementadenn abaoe 2020 evit Rannvro Breizh a-bezh. DDTM Aodoù-an-Arvor



a ra anv eus 36 gwech ma oa bet labourer an douar e-maez al lezenn e 2022. E 2021, e oa bet savet 4.000 goulenn aotre da labourat an douar e Rannvro Breizh⁷. Ur c'hard anezho a vez sellet outo er bodadoù, CDOA 'vez graet diouto. An abeg zo ne vez sellet ouzh ar goulennoù gant ar CDOA mann nemet pa vez meur a hini a-benn gouzout pehini dibab. Neuze, ma ne fell ket da unan kaout da ober gant servijoù ar Stad e vez gwelloc'h ober war dro an dud a vez war ar renk ivez en a-raok. Setu ar pezh a oa degouezhet gant Valérie. Ar memestra a vez gant ar Safer. Studial ha dibab a ra ar c'hinnigoù adprenañ douar. E 2022 e oa bet gwerzhet 40.000 hektar douar mat da labourat.

Ar Safer n'halle emellout mann nemet evit an hanter eus ar gorread-se [*Lenit eil rann an enklask-mañ*] an darn vrasañ anezho ne oant nemet gwerzhioù lodennoù bihanoc'h eget 3 hektar.

« N'EUS KET LEZENN EBET KEN, AR JANGLENN EO »

Mat eo da Soizig hag Hervé degermer ac'hanomp en o zi. « *N'hon netra da brouiñ ken, labourerien-douar omp pell zo ha perc'henn war hon douaroù* », emezi en ur virout ezteurel he fulor. Ha fulor he deus berniet gant red an istorioù liammet gant al labour, hini an douar, taolioù-kamm ha marc'hadoù an eil re ar re all. Ha deuet ar wech e re en nevez-amzer ar bloaz-mañ.

7] Hervez un diell bet lennet gant *Splann* !

« Spi 'm eus e cheñcho an traoù pa zo teir diouzhimp. »

Ul labourer-douar a oa aet da hadañ gwinizh e-barzh he fark. « *Galvet em boa Germain ha goulennet digantañ : gouest out da zisplegañ din perak zo gwinizh dit hadet e-barzh ma fark ?* ». Soizig zo fuloret, ha fuloret bras memes. Un nebeut mizioù abretoc'h he doa tapet an aotre da labourat an dachenn-se, ar pezh n'en doa ket bet Germain.

« *Brud fall a oa gant e dad, un den, divezh, efrontet a gustum lakaat gwask war an dud. Evit ar mab em boa soñjet e lezen ur chañs gantañ, din-me e oa onest.* » En ur gaozeal gant labourerien-douar-all eus ar vro e kompren Soazig n'emañ ket hec'h unan, div zesaverez-all zo wazh int-i ivez.

O zeir o doa bet an aotreoù labourat meur a dachenn a-stok, met Germain an hini zo aet e-barzh ar parkoù da gentañ. Hep aotre ebet. « *N'en em anavezemp ket an eil re ar re all a-raok* », a gont Justine. E kreiz miz Ebrel e oant aet d'an archerdi o zeir evit lezel ur roud un testeni « main courante ». « *Spi 'm eus e cheñcho an traoù pa zo teir diouzhimp.* », a zispleg

deomp Charlotte. Un desave-
rez loened-saout yaouank eo,
ha klask a ra war-lerc'h douar
evit ma vo solutoc'h he stal.
« *C'hoant hon eus da rediañ ar
Stad da ober he labour* », a lavar
Soizig kreñv. « *Ma vez tud oc'h
ober o jeuioù digastiz evel-se,
neuze ne vo reolenn ebet ken. Ar
janglenn eo. Hag alies e vez kont
e-giz-se.* »

Justine he doa bet un aotre evit
labourat 1,9 hektar, ar pezh zo
trawalc'h evit reiñ an dro dezho


da zesevel yêr. P'he doa gouezet e oa
aet Germain hag e dad e-barzh ar par-
koù e oa aet da welet an tad hag enrollet
he doa an diviz. « *An tad en deus ar brud
da vezañ pront, neuze em boa bet disfiz.
Ma'z aje an traoù a-dreuz, em bije bet ar
brouenn ne oan ket tagus.* » Tad Germain
ac'h anzav dezhi : « *Divalav eo evitoc'h.* »

UR C'HOARI FALSET

Kas ur goulenn aotre labourat an douar,
gedal an douaroù da werzhañ, mont da
welet ar berc'heien, sevel teuliadoù,
mont war ar renk gant al labore-
rien-douar-all, a-enep dezho, doujañ
eus reolennoù zo un hent hir ha kemer
a ra nerzh. Met n'eo ket evit se e weler
un disoc'h da heul. Istor Valérie, hini
Soizig, hini Justine, hag hini Charlotte a
ziskouez an dra-se.

Diwanet eo ar gwinizh, kreskiñ a ra
mat, brav eo ar parkad. Ar pevar labour-
rer-douar a sell ouzh an abadenn ha
n'hellont ober seurt-all ebet. « *Ur pezh
familh eo ha kenderc'hel a ra da greskiñ
en ur zebriñ douaroù. Ha d'ober petra e*

N'EUS KET KALZ A C'HALLOUT GANT SERVIJOÙ EN KARG EUS MERAÑ AN DOUAROÙ



Source : Safer, Draaf

kemer an douaroù ? n'eo ket evit al loened memes, eme Charlotte hegaset. Ordin e vez bec'h d'ar re vras. » O zeir e sellont ouzh an tad hag ar mab ne reont nemet kreskiñ o atant hag a zo erru 136 hektar bremañ. Justine he doa goulennet 1,9 hektar, Sozig 5 hektar, Charlotte 18 hektar.

Ar santad displijus bezañ kollet gant ur c'hoari falset ne dremen ket. « *Me gav din eo graet ar reolennoù-se, an SDREA ha kement zo tout da foutañ goap diouzhimp* », eme Justine. Ur santad displijusoc'h c'hoazh pa vez reolennoù a lak anezho e-maez ar jeu evit mont war ar renk. Da skouer e c'hall an nen prenañ douar

hep tremen dre ar Safer gant ma vez eus ar memes familh, betek ar pevare derez, da lavaret eo kindirvi-kompez, ha moerebezed kozh. Ha gant ar familhoù er c'horn-bro meur a remziad zo ez eo diaes talañ : « *N'hon do ket an dro da gaout douar biken gant seurt reolenn, eme Justine hegaset. Kaoz vez staliañ reoù yaouank, met penaos ober ?* »

An douaroniour Adrien Baysse-Lainé en doa studiet se. E 2020⁸ e skrive kement-mañ : « *Ma vez kevezerezh, e roont [ar pennadurezhioù] ar renk kentañ d'ar re eus ar memes familh, hep derc'hel kont eus ar ment na pegen bras eo an dachenn zo ganto betek-hen.* »

8] « Une géographie relationnelle de l'accès au foncier agricole en France », p12-13, *L'espace géographique*, éditions Belin, Adrien Baysse-Lainé, 2020

Justine zo aet skuizh : « Ar santad am
eus e lavar an dud evel Germain hag e
dad deomp "c'hwi, c'hwi n'oc'h ken nemet
bihan, n'oc'h ken nemet kaoc'h". Ha ne fell
ket din bezañ aloubet ma-unan gant seurt
tud a gav dezho ez int rouaned. »

Julie Lallouët-Geffroy

AN ADTAPOUT TIEZ-FEURM STANKET

Tost ur c'hard eus al labourerien-douar e Breizh a ya davet ul labour-douar padusoc'h gant doareoù eun da werzhañ, bio, gouniderezh legumaj ha desaverezh divoaz evel ar gouennoù lec'hel. Ar rummad nevez-se en deus da dalañ ouzh dispriz al labourrien-douar mestr, re hentad al laezh hag ar produñ ezdouar.



- 】 Darn eus ar berc'heien ne fell ket dezho gwerzhañ ma vez raktresoù divoas.
- 】 Rouedadoù-all a deu war wel evit aesaat staliañ ar raktresoù-se.
- 】 N'emañ ket o tont eus bed al labour-douar, ur vaouez, gwerzhañ war-eeun, sevel gouennoù lec'hel, gouniderezh, bio : pimpatrom ar remziad nevez.
- 】 E 2021 e oa 2.500 den war ar renk d'en em staliañ, e fin ar gont ne oa nemet un drederenn o kregiñ gant e stal er bloaz-se.

An afer-mañ a sko an DDTM », a gont un dileuriad eus ar c'hConfédération pay-sanne. « *Abaoe ma 'z eo aet an doser betek ar C'huzul Stad ez eo luziet* », eme ur vouezh aotreet eus an FDSEA. An afer-se zo hini Karim Arab. Un afer o c'hortoz un deziad evit an dalc'h er C'huzul Stad, live uhelañ ar barnadurezhioù.

E 2018 en doa c'hoant Karim Arab d'en em staliañ ha sevel deñved bio. An aotre en doa tapet evit labourat 54 hektar douar, met ul labourer-douar en doa tapet an aotre ivez. Ha hennezh-all a vo an hini kentañ da gaout ar parkoù. Koulskoude ez eo sklaer brastres renerezh rannvro ar plasoù labour-douar [*schéma direction régional des exploitations agricoles, an SDREA e galleg*], an diell a ro ar reolennoù evit dibab

ar re war ar renk zo didroc'h : unan oc'h en em staliañ e bio zo mestr war unan oc'h en em staliañ n'eo ket. War baper ez a ar maout gant Karim Arab ; war an dachenn ez eo Gaec ar Ruais an hini zo e-barzh ar park. Ar saver deñved a c'houlenn digant prefed rannvro Breizh tennañ an aotre labourat an douar digant egile, ha nac'het e voe gantañ hen ober e miz Du 2018¹. Karim Arab a gendalc'h ganti ha mont a rak dirak al lezioù-barn a-benn nullañ diviz ar prefed lezel Gaec ar Ruais er plas-se. E miz Genver 2022 e vo

roet rezon dezhañ gant lez-varn galv velestradurel Naoned.

Gaec ar Ruais a ya a-benn ha sezisañ a ra ar C'huzul Stad. Spi zo gant Karim Arab da c'hounit : « *An deiz ma vo kemeret harp gant ar varnadenn evit lakaat ar gwir d'en em staliañ da dalvezout e vin laouen, n'em bo ket kollet ma amzer evit mann.* »

Ruzal a ra an afer abaoe 2018 : ma vez ret d'an daou yaouank eus Gaec ar Ruais kuitaat al lec'h e vo pemp bloaz labour ha postadurioù kollet.

DONT DA VEZAÑ PEIZANT PA N'EUR KET EUS AR VRO

Karim en deus kroget da ober e vuhez nevez e Lanrelaz, en Aodoù-an-Arvor e 2005, pell-mat eus e vro c'henidik, ar Pikardi. « *Pa ne vezer ket mab d'ul labourer-douar ne vez tamm herêzh douar ebet. Ha pa ne vez ket pinvidik ar gerent, n'eus ket peadra da adtapout un ti-feurm.* » Labourat a ra kalz Karim, lakaat a ra arc'hant a-gostez, heuliañ a ra an hent evit en em staliañ evel ma vez embannet gant Kambr al labour-douar, solutaat a ra e raktres desaverezh deñved Shropshire. « *Plas zo war ar marc'had evit ar ouenn deñved-se ha talvoudegezh ouzhpenn a gasont hep kaout riskloù re* », a gont-eñ.

Goude ar c'whitadenn war an ti-feurm 54 hektar en doa kaset anezhañ d'an emgann dirak al lezioù-barn ha betek ar C'huzul Stad e kav unan 29 hektar e

« N'eo ket digor a-walc'h ar spered. »

1] Diviz gant lez-varn velestradurel Roazhon, miz Meurzh 2021

PIV EO AL LABOURERIEN-DOUAR OUZHPENN 55 BLOAZ?

40% EUS AL LABOURERIEN-DOUAR A OA OUZHPENN 55 BLOAZ E 2020




E 2010 NE OANT NEMET 26 %



70% ANEZHO OA PAOTRED HA 30 % MERC'HED E 2020



E PESEURT FILIERENNOÙ EMANÑ AR RE OUZHPENN 55 BLOAZ



Mammenn : Agreste, 2022, renabliñ an tiez-feurm e 2010 ha 2020

ti un amezeg. Mont a ra e darempred gantañ. Un deiz, diouzh ar mintin e kinnig dezhañ e raktres ha selaou a ra ar perc'henn gant resped. Goude-merenn e c'halv hemañ Karim ha soñj en deus mat eus an eskemm a oa bet : « - Ne dalvez ket ar boan prederiañ : an deñved, ne gredan ket e se.

- Met petra ra se deoc'h p'emaoc'h o werzhañ ?

- Du-mañ eo ! »

Ar respont-se en deus bet Karim ha reoù-all c'hoazh da dalañ outañ. « Ur c'hoant a vez gant al labourer-douar da vezañ mestr war ar pezh a vo graet gant an hini a deuio war-e-lerc'h, a zielfenn an desaver. Stag don en e greiz

o ar menaj. N'eo ket digor a-walc'h ar spered. »

RAKTRESOÙ A VEZ GWELET EVEL MONT WAR GIL

Evit ar re o doa gwelet Breizh (pevar departamant) oc'h arbennikaat er produiñ laezh, moc'h ha yêr ezdouar ez eo souezhus an doareoù nevez da labourat an douar ha divarc'hañ a reont meur a hini zoken. Ar Gambr labour-douar a ra un daolenn diouto.

E 2022 e oa un drederenn eus al labourerien-douar nevez labourerezed-douar. 42 % ar re oc'h en em staliañ ar bloaz-se ne oant ket eus ur familh liammet gant bed al labour-douar ha ne oant nemet 26 % e 2018. Ur c'hard eus ar re oc'h en em staliañ a oa, diouzh lavaret ar Gambr

« Evito kaout nebeut a loened zo mont war-gil. »

labour-douar² « *toleadoù bihan produñ* » : sevel deñved, kezeg, givri, chas ha kizhier, istri, gwenan, maligorned, gwerjez, plant frondus, plant louzeier, bara, bier, kaotigell h.a.,...

Sofia zo e-touez an tresoù nevez-se. Ur vaouez eo, n'emañ ket o tont eus un ti-feurm, o klask un dachenn vihan evit sevel ur ouenn lec'hel e bio da werzhañ war-eeun. Un degemer a oa bet graet deomp gant he chas ha harzhadeg a oa bet. War an daol-vras he doa lakaet Sofia un teuliad bras : studiadennoù ekonomikel, goulennoù aotre labour-rat an douar, lizhiri, pep tra zo e-barzh. Erruet e oa Sofia e Frañs ugent vloaz zo. Emañ o chom gant he c'hamarad Pascal en ul lec'h war ar maez ha tri desaver saout-laezh tro-dro.

E 2018 e oa graet he soñj ganti mont da sevel saout. Klask a ra un ugent

devezh-arat bennak evit sevel saout brizh-du. Saout-bihan ne reont ket kalz a laezh met kalz druzoni ennañ, mat-kaer d'ober amann, fourmaj ha Gwell, laezh-tev pe laezh kaouled, hanter-hent etre ar fourmaj gwenn hag ar yaourt. Evel Karim ez eus ur marc'had gant kalz a briz, n'emañ ket gant an doareoù boas Ha hi ivez n'emañ ket eus ar vro ha n'eo ket merc'h d'ul labourer-douar.

Tro-dro dezhi ez eus un toullad re o vont war o leve, ha tiez-feurm gant ouzhpenn 60 hektar douar. C'hoant he deus da lakaat hec'h anv war ar renk evit ur park 5

hektar ha kinnig a ra ur banne kafe da unan eus ar berc'heien. Kontañ a ra dezhañ diwar-benn ar brizh-du, ar Gwell, diskouez a ra ar sifroù dezhañ, ar studiadenn ekonomikel gant siell Kambr al labour-douar. « *Ar perc'henn en doa choazet an hini a vo war-e-lerc'h, unan gant saout-laezh boutin, a gont Sofia, blaz an trenk gant he c'homzoù. Kompren a ran e c'hallfe darn eus al labourerien-douar bezañ souezhet bras gant ma raktres. E-touez ar re o vont war o leve ez eus lod o deus bet ur vuhez simpl-tre, hag evito kaout nebeut a loened zo mont war-gil.* »

Skoet e oa bet Sophia met ne oa ket bet trec'het c'hoazh. Esaeañ a reas Sophia kaout muioc'h a chañs gant parkeier-all. Mont a reas da welet un desaver o vont war e leve nebeut goude. Eus 5 hektar a oa kaoz bepred. « *Respontet en doa*

2] *Création, reprise transmission, les chiffres clefs 2022*, diell kambr labour-douar Breizh, miz Mae 2023

PIV EO AL LABOURERIEN-DOUAR DINDAN 40 VLOAZ BET SIKOURET D'EN EM STALIAÑ

20 % EUS AL LABOURERIEN-DOUAR A OA DINDAN 40 VLOAZ E 2020




19,6 % EUS AL LABOURERIEN-DOUAR A OA DINDAN 40 VLOAZ E 2010



70% ANEZHO A ZO PAOTRED HA 30 % MERC'HED E 2020



FILIERENNOÙ MA VEZ AR MUIAÑ A DUD OC'H EN EM STALIAÑ



Mammenn : kamb ar labour douar Breizh, 2023
ha renabliñ an tiez-feurm e 2010 ha 2020

din en doa c'hoant da reiñ ar an dachenn d'unan yaouank en doa ezhomm 5 hektar da skuilhañ hañvouez [kaoc'haj]e loened. Lakaat a rae an hañvouez a live gant ma raktres a lako an ekonomiezh lec'hel da vont war-raok.»

DIAES EO DEGEMER AR REMZIADOÙ NEVEZ


Un desaver o vont kuit hag ur produour legumaj o tont a glot gant ur pemdez disheñvel hag ezhommoù disheñvel. An eil en do ezhomm plas da lakaat al loened da beuriñ hag ober boued dezho, egile a chomo war un

dachenn vihan da c'hounez legumaj. Ur saver moc'h ezdouar en devez kalz dleoù hag ezhomm en do muioc'h a savadur eget ur saver gwenan. Diaes eo keñveriañ sevel saout brizh-du evel raktres Sophia gant hini deñved Shropshire Karim.

Al labourerien-douar nevez, ar re gant tresoù divoas zo erru 20 % eus an dud oc'h en em staliañ e Breizh. Dont a ra da vezañ start ober van n'eus ket diouto. Ar sokiologourien François Purseigle ha Bertrand Hervieu a zeskriv³ an dalc'hoù tenn e bed al labour-douar. Dreist-holl tro-dro d'ar

3] Une agriculture sans agriculteurs, p58, François Purseigle et Bertrand Hervieu, éditions SciencesPo Les presses, 2022

STALIET MUIOC'H MUI A BEIZANTED HA N'INT KET EUS BED AL LABOUR-DOUAR



Mammenn : kambr al labour douar Breizh, 2023

re o devez c'hoant « *«tremen e bio», distreiñ d'ar peuriñ geot, degas gouennoù lec'hel pe lakaat e pleustr hentadoù gwerzhañ war-eeun* ». Al labourerien-douar-se « *a gav war o hent tud na gredont ket anezho, pe kasoni memes alies-mat. Ha kavet e vez ar gasoni muioc'h c'hoazh pa vez kaoz en em staliañ gant ar "re nevez deuet". Peurliesañ e vez nac'het dezho prenañ douar.* »

An douaroniour Adrien Baysse-Lainé, enklasker CNRS e skol-veur Grenoble Alpes, a ziefertenn pegen digempouez eo kaout an dro da gaout douar : « *Evit ar re e penn an FNSEA, ar sindikad muiañ niver gantañ, ez eo al labourerien-douar*

dellezekañ (da lavaret eo ez eont gant hent ar pal modernaat al labour-douar) a dle tremen da gentañ ; evit ar c'hConfédération paysanne, ez eo ar re o devez ezhomm douar ar muiañ, da lavaret eo an tiez-feurm bihan, a dle tremen da gentañ ; evit ar c'hCoordination rurale, sindikad eus an tu-dehou muioc'h, ez eo doujañ ouzh dibab ar berc'heien ar pep pouezusañ. »

Adrien Baysse-Lainé a zeskriv⁴ aozadur un doare-all d'ar rouedad sindikad penañ gant « *enep-rouedadoù* ». An aozadurioù, ar sindikadoù ha kevredigezhioù zo e luskad an tu-kleiz peizan, e-giz ar c'hConfédération paysanne, al

An testenioù bet en enklask a eztaol santadoù direizhder kreñv

4] « Vers un accès au foncier plus inclusif pour les néo-agriculteurs », Adrien Baysse-Lainé, *Èrès*, 2022

luskad Via campesina, ar Civam-
où, ar pol Inpact, an A-dear-où,
ar Ciap-où pe c'hoazh Terre de
liens a ra stummadurioù war
gwir ar prenañ douar, gedal a
reont ar gwerzhioù ha harpañ
a reont ar re o devez c'hoant
d'en em staliañ. Ganto e vez ivez
keodedourien a striv evit ma vo
raktresoù di-voas, evel Terre
de liens a bren douaroù gant
arc'hant esperniet keodedou-
rien a-benn staliañ peizanted.
E-tro tri-ugent⁵ abaoe 2006 e
Breizh. « *E stummoù zo, e vez ad-
savet ar memes doareoù da ober
hag ar sindikalouriezh muiañ-niver
gant an obererezhioù-se. Sevel a reont
rouedadoù nevez diouzh ma plij dezho
ar raktresoù, e-kichen ar rouedadoù-all,
ha keleier a vez kaset* », a zielfenn⁶ an
douaroniour.

ADAOZAÑ MARC'HAD AN DOUAROÙ, AN DRA GENTAÑ DA OBER ?

An testenioù bet en enklask a eztaol
santadoù direizhder kreñv en dibaboù
tapout an douaroù. An douaroniour
Adrien Baysse-Lainé zo evit ur jus-
tis war ar font⁷. Ar gwirour Benoît
Grimonprez⁸ a ginnige-eñ un adaozañ
ar font e 2018. Kas a ra da soñj eo an
douar « *ur mad dre gevezerezh, ma vez*

Lakaet e vo e pleustr lezenn Sempastous adalek miz Ebrel 2023

*unan war an douar e vount egile kuit dre
ret. Alese an ezhomm aozañ en a-raok
ha gwarantiñ e c'hello pep hini ober
e vad eus an douar gant un dasparzh
reizh etre ar geodedourien* ». Kinnig a
ra bodañ an holl ensavioù liammet
gant ar font en un aozadur hepken,
diwar skouer ajañs vroadel ar vevlies-
seurted. Un ensavadur savet diouzh
un tu gant « *un ensavadur demokratel
awenenet diwar "parlamant lec'hel an
dour"* », ha diouzh un tu-all un ensava-
dur tost « *d'ar re zo bremañ "bodadoù
teknikel Safer" pe bodadoù departamant
heñchañ al labour-douar a vefe goulenn
net e ali digantañ evit kement goulenn
aotre.* »

5] « Les fermes », lec'hienn internet Terre de Liens Breizh, bet sellet ouzh e miz Gwengolo 2023

6] « *Vers un accès au foncier plus inclusif pour les néo-agriculteurs*, p21, Adrien Baysse-Lainé, Érès
« espaces et sociétés », 2022

7] « *Inégalités et rapports de domination dans la gestion du foncier agricole en France au prisme de la
justice foncière et de la land justice* », Adrien Baysse-Lainé, Coline Perrin, *Justice spatiale*, 2021

8] « *Nouvelle utopie foncière : pour une autre régulation de la maîtrise du foncier* », p3, Benoît
Grimonprez, *Revue de droit rural*, 2017

N'eus ket bet eus an adreizh font-se. En e lec'h emañ al lezenn Sempastous bet votet e 2021, da vezañ lakaet e pleustr adalek miz Ebrel 2023, honnezh a gresk galloudoù emellout ar Safer.

Evit Breizh e vo embannet un SDREA nevez ar bloaz-mañ, an diell-se a renabl ar reolennoù evit bezañ an hini kentañ dagaout an douaroù. Cheñchet eo neuze bremañ, en em staliañ zo er renk kentañ dirak astenn an dachenn pe eskemm parkeier. An dilennidi rannvro o deus votet a unvouezh evit an diell nevez-mañ. Un trec'h evit ar Rannvro a dap muic'h a varregezhioù e domani al labour-douar.

E-barzh un danevell⁹ eus miz Ebrel diwezhañ e talc'h Lez ar C'hontoù da soñj e vez dalc'het las ar yalc'hadoù evit ar sikourioù d'en em staliañ gant ar rannvroioù ha int-i a zibab diwar be-seurt abeg e vo roet. Un doare a c'hell Rannvro Breizh implijout evit cheñch tresoù al labourerien-douar a fell d'ar galloudoù publik kaout. P'hon doa savet ur goulenn diwar-benn ar poent-se ouzh bez-presidant ar Rannvro e karg al labour-douar, Arnaud Lecuyer, en doa nac'het respont deomp.


A-benn fin ar bloaz e vo votet sañset ur pakt hag ul lezenn war heñchañ ha dazont al labour-douar ha tri ahel alese : ar stummañ, ar staliañ hag an azasaat d'ar cheñchamant hin. Evit al lodenn diwar-benn ar staliañ e oa



bet lezet meur a ginnig war burev ministrerezh al Labour-douar e miz Mezheven¹⁰. Er renk kentañ : gouzout piv eo « *ar re nevez, an danvez labourerien-douar, ha dreist-holl ar re o tont eus kêr ha n'emaint ket eus bed al labour-douar.* ». E Breizh e kaver an dud-se. E-tro 2.500 a dud a oa bet o

9] *La politique d'installation des nouveaux agriculteurs et de transmission des exploitations agricoles*, p63, Lez ar c'hontoù, miz Ebrel 2023

10] Diell kinnigoù strollad labour Staliañ peizanted nevez e-barzh lezenn nevez dazont al labour-douar, miz Even 2023



welet ar burev degemer ar staliadurioù er Gambr labour-douar e 2021. 600 a oa aet betek penn o hent stummañ. 507 a oa en em staliet gant ur yalc'had. 270 a oa en em staliet hep yalc'had. Ar pal zo kaout 1000 a dud

oc'h en em staliañ bep bloaz, « *N'emañ ket an dalc'h gant ar re nebeut a dud war ar renk e Breizh met ezhomm zo harpañ anezho.* »¹¹

Julie Lallouët-Geffroy

11] « La Région adopte une nouvelle stratégie régionale pour l'installation-transmission », pennad d'ar gazetennerien bet kaset gant Rannvro Breizh, miz Kerzu 2022



Lakit hoc'h anv a-benn degemer al lizher-kelaouiñ !
Dedennet oc'h gant ar pezh a c'hoarvez er vro ? Gant an endro hag al labour-douar ? C'hoant 'peus bezañ titouret pa 'vez embannet un enklask gant *Splann!* ? Gall a reoc'h heuliañ ha souten ac'hanomp en ur lakaat hoc'h anv a-benn degemer hol lizher-kelaouiñ bep miz war www.splann.org

Klevet 'peus kaoz eus Splann ! ?

Splann ! a zo ur gevredigezh (mod lezenn 1901) a zo he fal dezhi kas da benn enklaskoù-kazetenniñ poellek evit an dud e Breizh hag ar bed, e galleg ha brezhoneg. E Bro-Dreger, e Gwengamp, emañ staliet.

Erruet eo *Splann !* d'ur mare eo diaesoc'h diaesañ ar jeu evit ar gazetennerien. E Breizh, ouzhpenn 500 kazetenner o doa sinet ul lizher digor kaset d'ar rannvro e 2020 : ganto e oa bet embannet sklaer ez eus diaezamantoù bras evit titouriñ mat an dud diwar-benn industriezh gounez-vouedel ar vro. Kement se a zo, evel-just, chalus-tre evit ar geodedourien. Soutenet eo bet al lizher-mañ gant 50.000 a dud. Kazetennerien 'vez paeet gant *Splann !* a-benn kas enklaskoù don war an hir-dermen. Pep tra a-drugarez d'ar re a harp ar gevredigezh. Embannet e vezont digoust war he lec'hien ha gant mediaoù a genlabour gant *Splann !*

Ur media dizalc'h...

Muioc'h mui e teu da vezañ mediaoù gall e daouarn tiez-bank hag embregerezhioù bras. Ar c'hontrol-mik a vez graet gant *Splann !* Arc'hantaouet e 'vez an enklaskoù gant ar geodedourien 'zo kizidik ouzh frankiz ar c'hazetenniñ.

Tost an holl arc'hant 'vez tapet gant *Splann !* 'zo bet roet gant an dud, en linenn pe dre chekenn. Gall a ra ivez bezañ arc'hantaouet gant kevredigezhioù all a zo kizidik ouzh frankiz ar c'hazetenniñ, pe gant yalc'hadoù 'zo. Met ne 'vez ket degemeret arc'hant na digant embregerezhioù, na digant strolladoù politikel, na yalc'hadoù digant strollegezhioù lec'hel. Gant *Splann !* 'neus ket na perc'henner pinvidik na bruderezh na kevrannerien (actionnaires, en galleg). Ur c'homite evezh a ra war-dro eus pelec'h e teu an arc'hant a-benn ne yafe ket a-enep karta embann *Splann !*

... hag a zifenn an enklaskoù war an hir amzer

Aet eo da vezañ primoc'h-primañ bed ar c'heleier. Ganeomp-ni 'vez difennet ur c'hazetenniñ war an hir-amzer a-benn lakaat ar gaoz war sujedoù kizidik e Breizh. O chom er vro emañ kazetennerien *Splann !* Eus Naoned betek ar Gerveur ha Lannuon e 'vez furchet ganeomp a-drugarez d'an titouroù kaset deomp hag hon labour bemdez.

Krediñ a reomp o 'deus ezhomm ar geodedourien eus enklaskoù don ha sirius a-benn ober o soñj dezho war ar bed. Un doare da reiñ ostilhoù a-benn kompren enkadenn sokial, an endro hag an demokratelezh.

Adkavit ac'hanomp war ar rouedadoù sokial :



@Splannenquetes



@Splannenquetes



Splann lanceur
d'enquêtes



@Splannenquetes



Splann

Gwriziet mat eo *Splann* ! E Breizh. Anat eo e 'vez soutenet ar brezhoneg a zegas pinvidikaez hag ur sell disheñvel en hol labour. An holl enklaskoù 'vez embannet en div yezh d'an nebeutañ.

Ur stumm kevredigezhel

Splann ! 'zo ur gevredigezh lezenn 1901 hag eo dreist-holl dre dud a-youl vat ez a en-dro. En holl, 25 den ouzhpenn 'zo abaoe eo bet krouet *Splann* !, tro-dro da 15 anezho 'zo kazetennerien. Setu an dud a gemer perzh en emvodoù-meur hag o 'deus droet da votiñ. Klask a reomp e vefe ar muiañ demokratel posubl mont en-dro ar gevredigezh.

Gant ar c'huzul embann 'vez dibabet sujedoù an enklaskoù hag ar gazetennerien a vo o labourat warno. Gant ar c'huzul-se vez roet skoaz ouzh ar gazetennerien 'zo oc'h enklask. Mont a ra ivez en darempred gant ar mediaoù a embanno pe skigno ar pennadoù. Kazetennerien a-vicher indi ar re a gemer perzh er c'huzul-embann. Dilennet e vezont gant izili ar c'huzul-merañ hag, izili ar c'huzul-surentez.

Gant kazetennerien pijisted 'vez graet an enklaskoù 'zo bet dibabet gant ar c'huzul embann.

Ober war-dro mont-endro *Splann* ! a vez graet gant ar c'huzul-se. Pep dilennad a zo par d'ar re all a-fed pouezh ha kargoù. Gant bodad-meur ar gevredigezh e vezont dilennet.

Lennit hon enklaskoù diwezhañ war splann.org

- *Breizh : c'hwezh an amoniak er maez*, Caroline Trouillet, miz Even 2021
- *Iberdrola. Pa vez louz ar jeu gant an energiezh « naet »*, Itzel Marie Diaz, Lena Lopes, miz Meurzh 2022
- *Metan : Bec'h d'an atant*, Julie Lallouët-Geffroy, Raphaël Baldos, miz Gwengolo 2022
- *Essure : drouk mouget e korf ar merc'hed*, Juliette Cabaço-Roger, Faustine Sternberg, Guy Pichard, Rozenn Le Carboulec, miz Here 2022
- *Moc'h fall*, Inès Léraud, Kristen Falc'hon, Floriane Louison, miz Gouere 2022
- *Brezel ar parkeier*, Julie Lallouët-Geffroy, miz Gwengolo 2023
- Pevat enklask zo o tont e 2024

Ezhomm 'neus ac'hanoc'h Splann !



► A-benn goprañ kazetennerien, tresourien, fredoù-hent hag all 'neus ezhomm ac'hanoc'h Splann ! Evit poent eo bet arc'hantaouet hag embannet pevar enklask a-drugarez d'ho tonezonoù.

► M'ho 'peus c'hoant e vefe kendalc'het da vevañ ar c'hazetenniñ dizalc'h e Breizh, harpit ac'hanomp !

Gall a reoc'h reiñ el linenn war www.splann.org pe dre chekenn :

« Da *Splann !* » eo dav deoc'h skrivañ war ar chekenn ha kas anezhi da *Splann !*,

3 plasenn Maez ar Roue, 22200 Gwengamp

Titouroù da gas deomp ?

Titouroù pouezus evit ar gevredigezh 'zo ganeoc'h ? Dokumantoù kizidig pe danvezioù e rankfe Splann ! enklask diwar o fennoù ?

Kasit deomp ur postel kentañ gant ur chomlec'h hep hoc'h anv (gant un anv fals ma karit) a-benn displegañ deomp eus petra 'zo kaoz berr-ha-berr. Gwelloc'h eo implijout posteloù evel Protonmail. Respontet 'vo deoc'h penaos ober evit kenderc'hel an tabut ha kas deomp an dokumantoù.

Mont en darempred

contact@splann.org

Splann !, 3 plasenn Maez ar Roue, 22200 Gwengamp

Splann !

Ti ar Vro
3, plasenn Maez ar Roue
22 200 Gwengamp

Penn rener an embann
Alain Goutal

Bet skrivet gant
Julie Lallouët-Geffroy

Bet treset gant

Jean Leveugle,
les savoirs ambulants

Lakaet brav da lenn
Anne Caillet-Leroy

Stlenngraferezhioù
France 3 Bretagne, Julie
Lallouët-Geffroy

Bet sikouret gant

Juliette Cabaço-Roger,
Anne Kiesel

Bet lakaet brav gant
Juliette Cabaço-Roger,
Julie Lallouët-Geffroy

**Raphaël Baldos en deus
kemeret perzh el labour**

Moulet e Cloître
ZA Croas-ar-Nezic
29 800 Saint-Thonan

Fiziad lezennel :
Fin 2023
ISSN: 2800 - 664X



